

# CRIM PLERIN

Eun den trochet a damou gant e vreg dan  
nao deus a vis c'huerver 1883

Tirage différent du 527 OLLIVIER

(VAR DON : HENRIET LONGEART)

Clevit kristenien fidel celaouit recita,  
Eur vue ag eur mal'heur deus an effroyapla,  
Gant eur vreg en e koler, e ze bet komettet,  
E den n'eur antren er ger e deveus bet lazet.

Aboe deg pe daouzeg vloas, e oant sur demeet,  
Da heuill o bue mal'hevrus, e zint bet komanset,  
Rag allas gant ar boisson, e den a oa kollet,  
Ar bligeadur bars an ti, james vije goelet.

Bea deoa an daou man, eun tamig peadra,  
Mar karjent en em zicour, evit gallout beva,  
Neuze vijent bet evrus, ar rest deus a bue.  
Mes an diaoul zo tentus, o foulzas nos a de.

Per an Hery dre val'heur, gant ar boisson kollet,  
En e baros en Plerin, oa boissonnier brudet,  
A pa n'eur gave er ger, kollet gantan reson,  
E vreg ountan fachet bras, a vije divergont.

Dan nao deus a vis c'huerver, tri a pevar-ughent,  
E bet komettet ar c'hrim, vit rei dec'h da entent,  
Per an Hery en boisson, adare n'em rentas,  
Ar goell vue entreze, ragtal a gomansas.

Goude kals a rebechou, demeus an daou goste,  
Per an Hery breparas, monet en e vele,  
Neuze e vreg dosteas, en e dorn eun drinquen,  
A gant eun tol seulamant, en diskaras kerkent.

Ar vechantes en koler, a skoas krenvoc'h kren,  
Rag emei aon e deoa, vije ket maro tre,  
Eur forc'h ouarn a gemer, vit d'ont da finissa,  
Bue an' ini oa bet, goechal, e brassa joa.

Didan an tolliou trinken, an tolliou forc'h ouarn,  
Ar mal'hevruz renk meravel, allas tre en daouarn,  
Goelet a ra an den ze, pehini doa karet,  
Entre e zreid massacret, leun oad difiguret.

Breman petra a rin me, da guzat va zorzet,  
Ne on petra da ober, na gout pelec'h monet  
Goelet a ran va dillat, tout beuet gant ar goat,  
Abenn ma vo fin dan nos, rank bea kuzet mad.

Hep ma timinu e ners, d'ar vechantes ingrat,  
E deus treignet ar c'horf paour, treanted en e oad,  
Ebars er c'hao goloet, paket a kempennet,  
Gout pelec'h en enterri, allas na ouïe ket.

Oh, ma Doue, ma Doue, kruella feumellen,  
Sklassi a ra va memprou, pa deuan da gompreñ  
Kemeret e deus an hac'h, vit en trec'hi a damou,  
Vel a ve gret dal loenet, sioas bars en or bro.

Bebeus kigeres infam, james ne oa klevet,  
A dindan ar firmamant, biskoas ne oa goelet,  
Eur vreg oc'h hacha damou, sios dei e fried,  
An ini a oa goechall, ganti kement karet.

Goude deus troc'het ar c'horf, ontan e deveus gret ;  
Tri zahat evit o c'hass, ragtall da Zant-Briez,  
En eur eruout eno, en kichen eur velin,  
E deus tolet an tamou, bars en rivier souzin.

Enpad ma oa er prison evel pa oa er mès,  
E galon a oa karghat eus a fallagries  
Ma lakas lavarat d'eur beleg dont ver e dro.  
Vit ma alge kent mervel ansao e oll grimou.

Ragdal ma e goulennet ar beleg zo deuet.  
Evit covez anean vel men d'oa goulennet,  
Mar covesseas dean eno tout e grimou,  
Rag emean gout a re e zage dar maro.

Dan de varlerc'h da eis heur goude e oferen,  
C'heas adare dar prison da gaout ar c'hriminel,  
Mes en eur dostat outan e neveus an mouget,  
A deus a greis e yerc'het sioas e bet marvet.

Neuze ar monst infernal, petra a neus songet,  
Tenna e zillad digantan, n'em viska en beleg,  
Sortial deus ar prison abiou dar geolier,  
Ep bea bet arrêtet gant den demeus ar ger.

Pa oa skuis or mest divin o velet e grimou,  
Na deueket da sponta rag e buissançou,  
E ze bet ad kemeret a kasset dar prison,  
Ag e neus ar guillotin evit punition.

Dar seis demeus a vis maë oa laket ar suplic,  
Bars en kourdassis roazon gant an dud a justic,  
Neuze nije bet renket pignat vas ar chafot,  
Evit pea e grimou dirag bisag ar bobl.

Neuze demeus ar prison e ze bet digaçet,  
Na gant eur beleg santel kichen ar potanç dresset,  
Ag eno a voes huel e neus bet lavaret,  
Ar c'homzou truezus man a zo bet rapportet.

Oh, c'hui oll dud va c'hanton tud kos a yoankis,  
A ya da vea test demeus va goell suppliqç,  
Sellit va fin ken infam karil ato ar vertu,  
A neuze vefot bepref ~~guir~~ bugale Jesus.

Rei a ran va c'horf paour en chatimant hirie,  
A va ene a roan o krena da Zoue,  
Ra deurvezo e receo ebars n'he garante,  
A graç m'er possedo hed an eternite.

An ini a neveus gret ar recit a nevez,  
Zo kondaonet da vale tre ma vo en bue,  
Dre ar vro ne rer ontan neme ar c'haner bras,  
A zouet demp oll yec'het en envou beb a blaç.

FIN

(*Propriété de l'auteur*),

**TAOC**